

BARZONEK

EN ENOR DA

LA TOUR-D'Auvergn,**Qenta Grenadier a Franç.**

EVIT BEZA CANET E CARAHES, DEIZ LID STATU AN HAROS,

Ar 27 Even 1841, daou-uguent vloas just goude e varo.

 Var ton : *Deomp oll, bugate qenvrois.*

SALUD, ô Haros bras Breiz-Izel,
 LA TOUR-D'Auvergn, scoüer ar vaillanç,
 Te pini a voe atao fidel
 D'ar bannier sac'r demeus ar Franç! (2 vech.)
 Sell diouzomp diouz lein an ênvou
 Amà oll etal da imach,
 O renta did hor güir hommach
 Hac ouz da veuli dre hor moueziou.....

Gloar da LA TOUR-D'Auvergn, scoüer eus ar güir vaillanç!
 Breizis! Breizis! celebromp oll Qenta Grenadier Franç!

Seitec vloas ha pèvar-uguent zo
Carahes a velas guenel
An Haros bras a veulomp hirio,
Vaillanta den a Vreiz-Izel. (2 vech.)
En deiz-mâ, ni, Armoricanet,
Dirac an den ar vaillanta,
Toùomp da veza dign ountâ,
Rac ni ivez e Breiz omp ganet. Gloar, etc.

A boan a bemzec vloas voe oajet,
Ma sant e galon o sailla :
Goad Turen' red en e voaziet ;
Birvi a ra d'en imita. (2 vech.)
Redec a ra vit en em vesca
Etouez hor zoudarded vaillant ;
Atao e penn e rejimant,
Netra na ell ountâ resista. Gloar, etc.

Mes ar seiz varnuguent a even,
Ebars er bloaves mil eiz cant,
Er penn demeure e c'hrenadourien,
Pa gombatte en den vaillant, (2 vech.)
E creiz ar c'harnach eus ar goassa
E voe lazet gant un toll lanc
Ar C'henta Grenadier a Franç,
Un haros demeure ar re vrassa.....
O devez a c'hlaç'har hac a gaòn er Franç oll!!!...
Breizis! Breizis! e c'hloar hepquen hor c'honsol eus e gòll.

Eur seurt maro voa dign diountà,
Peguement m'eo meurbet garo,
Rac n'eus qet caeroc'h fin er bed-ma
Eguet mervel vit ar vam-bro. (2 vech.)
Coueza' ra evel ur güir haros,
En eur gombatti gant ardor :
Maro eo er C'hamp-a-Enor ;
En ênv e mâ brêmâ o repos. Gloar, etc.

O veuli hon Haros en deiz-mâ,
E veulomp an oll vertuziou,
Rac oll e voant unanet ennâ :
Ën eo Haros an oll vroyou. (2 vech.)
Lealded, furnez ha vaillantis
A gargue beporet e galon ;
Beza voa scoüer da bep Breton ;
Criomp eta, coziad, yaouanqis : Gloar, etc.

Carantéz sacr demeus hor mam-bro,
Cundu ha harp brec'h peb Breton,
Ha gra ma en devezo ato
Courach hon Haros er galon. (2 vech.)
Scrifomp beporet var hor guitonou :
LA TOUR-D'AUVERGN, BREIZ-IZEL, FRANÇ,
Hanoyou leun eus a vaillanç,
Hac a ray tridal ar galonou. Gloar, etc.

Ah ! ra vezo an devez caer-mâ
Gravet atao en hor memor ,
Vit ellout d'hor bugale conta
An hommach rentet d'an enor. (2 vech.)
O clêvet fêjou an den vaillant ,
E clasqint dont d'en imita ,
Evit un deiz ellout beza
Eveltàn leun a gourach ardant.
Gloar da LA TOUR-D'Auvergn , scoüer eus ar güir vaillañç !
Breizis ! Breizis ! celebromp oll Qenta Grenadier Franç !

